



CANTIC NEVEZ.

Voar eun ton anavezet.

SPERET divin, lagad Doue,
 Inspiret en ho pugale
 Da zont gant soign ha diligeañç
 Da admira ar Brovidañç.

An tad a gonsolation
 A Zigaz deomp ar mission
 Ebars e baros Plounevez-Porzet.
 Da glasq an denvcd egaret.

Medecinet an eneoù,
 Baleet jardinou an autrou;
 Clasquet al louzou convenabl,
 Seiz clenvet oc'h eus voellat.

Autrou, digorit ho perc'her,

Israël e devez mizer ;
 Clàn eo ar bobl gant al lournac'h,
 Quen e vo trempet en ho c'raç.

Dre ur speret a vedizañç,
 Orgouil, avariç, negligeanç,
 O deus tarchet hon eneoù,
 O redeg voar lerc'h ar maro.

Hirio e tisquen eus an eê
 Sourcen ar c'hraç, dour ar vue,
 Mar guellomp cavet un daquen,
 Vezomp grêt yac'h eus ar vocen.

Malheur d'an den a vo hardi
 Da guemer, hep en em voalc'hi,
 Eus an dour sac' ha précius
 Sortiet a galon Jesus.

Guell e ve mil guech coll ar bed,
 Erve souten an doctoret,
 Evit dont ur c'hristen dre arrach,
 Da gometti eur sacrilach.

Eun exempl d'ar benitantet :

Brec'h Osa a so disec'het
 O tont da douch dre imprudanc
 An dorn eus an arc'h alianç.

Ni gleo morzol ar goncianç
 O squei var dor an neglijanç,
 Ni ho supli, Speret-Santel,
 Chomit gueneomp bete mervel.

Ha c'houi, pastoret venerabl,
 Digassit deomp, abers hon tad;
 Quemeret eus a zorn Doue
 Eur presant caër d'e vugale.

Deut da rei deomp eur binigen,
 Da esperi an absolven,
 Pa bromet heritour sant Per
 Pardon hag induljanç plenier.

Me ho supli, penitantet,
 Pa zeot e bourg Plounevez Porzet,
 Da zaludi a vir galon
 Croas precius ar mission.

Honnes hon eus bet vir boquet

Digant hon tadou pastoret ,
 Hac a so precius meurbet ,
 Emàn enni Salver ar bed.

Sel ountàn-ta , pec'her ingrat ,
 Gouliet e zeo pen ha troad ,
 Corf Jesus-Christ , hor guir autrou ,
 Sivoas gant hon oll pec'hejou.

Sonjomp , pec'herien dirazon ,
 Peguen quer eo bet hor rançon
 Da Jesus-Christ , salver ar bed ,
 Zo evidomp oll crucifiet.

Consider-ta , pec'her ingrat ,
 Guela a gle da zaoulagat ;
 Ha te , pec'herez milliguet ,
 Lavar adieu da bep pec'het.


Consideromp ar garante
 A Jesus-Christ , guir vab Doue ;
 Deut eo da rei deomp hor pardon ;
 Mar er goulennomp a vir galon.

Na gredomp ve hini ebet

Ebars en paros Plounevez Porzet
 En defe lest hep profitàn
 Demeus eur c'hraç evel oumàn:

Ar baroziou-all divar dro
 Zo deut ive d'ar remejou ;
 Graç deoc'h oll da veza profitet ;
 Ma en em velfomp er joaüdet.

F I N.



CANTIC

AN AVE, MARIA.

Var an ton ordinal.

ME ho salud , Mari , gant respet ;
 Merc'h da Zoue oll-galloudec ,
 Crouet gant tad eternal ,
 Evit anjandri e vuguel.

Mari , c'hui a so benniguet ,

Mam d'an eil ferson an Dreindet ,
 Meritet hoc'h eus an henor
 Laquât er bed hor Redemptor.

Mari tenzor ar bobl fidel ,
 Ha pried d'ar Speret - Santel ,
 C'houi eo ar froezen a vue ,
 Profetizet da bobl Doue.

Guerc'hes , mam douç ha mam dener ,
 Sellit en draouyen a vizer ;
 Ni zo accablet nos ha de
 Gant adversourien hon ene.

Alc'huez tenzor graçou Doue ,
 Grit ma vezimp ho pugale ,
 Rac adre ho taouarn , Mari ,
 Biscoas n'en deus collet hini.

F I N.



CANTIC NEVEZ

EVIT AR SALUT.

Voar un ton latin : Venite , adoremus.

CHRI^{STENIEN}, pobl eürus, guir vugale
da Jesus,

Deut.... adoret ho mästr carantezus,

En envou hon roue hag hini an ælez :

Adoromp-èn a galon, (2 vech.)

Adoromp-èn gant guir devotion.

Jesus a so presant er sacramant santel,

Jesus a zo map d'an Tad eternal,

Jesus, mab da Vari, ni a deu d'oc'h adori :

Ni oc'h ador a galon, (2 vech.)

Ni oc'h ador gant guir devotion.

O pebes carantez oc'h eus, salver ar bed !

Da chom ganemp en hosti consacret

Evidomp bemde da vezur hon ene !

Ni oc'h ador a galon, (2 vech.)

Ni oc'h ador gant guir devotion.

Prosternet d'an douar dirag ho majeste ;
 Ni oc'h ador, Jesus, guir vab Doue :

Roit deomp, ni ho ped, ho penediction.

Ni oc'h ador a galon, (2 vech.)

Ni oc'h ador gant guir devotion.

Ælez demeus an eê, oll sperejou eürus ;
 Canomp-ni oll melodi da Jesus,

Ar *Gloria in excelsis Deo*.

Meulomp Doue assambles, (2 vech.)

Meulomp Doue bremàn ha da jamæs.

A M E N.



E. QUIMPER, e ty Y. J. L. DERRIEN,
 Imprimer at Roue.